



“CAMP CATALOGUE”

05 / 07 / 2015 | ARZ, JIL DANIEL

Roazhon, e kreizig kreiz ar c'hreiz-kêr, dindan plasenn Republik, er greizenn arzel La Criée. Eno ez eus bet digoret un diskouezadeg nevez-savet gant Jérémie Gindre, Camp Catalogue e anv.

Teir delwenn goad a zo staliet er sal vras : ur pont, ur banell, ur bank ; evel tri skouer eus an arrebeuri diazez graet evit ar bourmenerien. Tro-dro e kaver un nebeud tresadennoù lakaet a-strolladoù ouzh ar voger : tresadennoù biologel ? tresadennoù douaroniel ? Reoù geologel ? Ne ouier ket re petra e tiskouezont holl met ar memes blaz a zo gante. Livet dre ar munud e du war baper gwenn, etre tresadenn skiantel ha bandenn-dreset.

Ur wezh an amzer ez eus bet lakaet un destenn etre ar strolladoù tresadennoù, evel pa vefe bet luc'hskeudennet pajenn ul levr hag adlivet anezhi e bras. Ha tennet int bet eus ur romant ? Ha skrivet int bet gant an arzour ? An testenni-goù-se a c'hellfe bezañ tennet eus istorioù pourmenerien. Ar re o deus graet an tresadennoù ?

E penn ar sal ouzh an tu-dehoù, ez eus ur sal all, gwer he moger. Enni tresadennoù all ha tannoù koad bet stummet gant mab-den. Estreget ar voger livet-se ha liv ar c'hoad implijet evit an delwennoù e chom pep tra e gwenn ha du. Al leur a zo griz ha kazi lufurus, ar mogerioù uhel a zo chomet gwenn, estreget ul linenn zu, evel un dresadenn skiantel all.

Aze emañ ar pezh a zo distabilaus : kontet e vez deomp un istor buhezek en ul lec'h divuhez. An oberennoù a zo staliet er memes mod hag en ur mirdi a bourmenadennoù.

Hag amañ e soñjer en-dro en Elize Reklu, paotr ar pourmenadennoù ha douaroniour a-vicher, bet o skrivañ testennoù lies da ziskrivañ ar pezh a wele ha da zisplegañ penaos eo savet ar gweledva gant an dour*. Un nebeud sizhunvezhioù zo hon doa troet tannoù eus unan eus e destennoù :

“E fin ar Saloñs, unan eus ma mignoned a gar kalz an traoù brav, a zo chomet mantret. []Hag eñ da glemmichal peogwir n'en doa ket gwelet an holl delwennoù ha livadurioù a veze komz diwar o fenn er c'helaouennoù ispisializet.

Arabat dezhañ bezañ nec'het, mignon kaezh ! Ur bourmenadenn e gwennednoù ur c'hoad, war an delioù sec'h, pe ur vunutenn diskuizh war bord ur feunteun glan, () a frealzo anezhañ da vezañ c'hwitet e vizit er palez boas lec'h ma vez bep bloaz bac'het e-pad ur frapadig a pezh a vez anvet an “arzoù-kaer” Daoust hag-eñ n'eo ket ar gwellañ tra mont d'ober an daou ?

(*Histoire d'un ruisseau, embannet e galleg gant Babel)